

# Sourdardet va Brô

461

War don : “ Breudeur  
ni glev ho klemmou ”

D'al Louzaouer Ar Fur.

1

Soudardet a Vreiz-Izel  
Kousket enn douveziou,  
Den all na neuz, er brezel,  
Ho nerz hag ho poaniou.  
War ar c'hrimennou pella  
Falc'het gant ann Anko,  
Bepred e zoc'h da genta,  
O Soudardet va Brô !

2

Ma ver e devalijen  
Ha tost d'ann enebour,  
Piou a roio sklerijen,  
Ha digaso sikour ?  
Dreist holl, ma breudeur Arvor,  
E touez ar fank, ar goad,  
Dreist-holl war hent ann enor,  
Breiziz a galoun vad !

3

O Franz, war da Vretoned  
Distrô da zellou skler,  
D'anaout ho fealded,  
Ho zouj enn da genver,  
Digor frank da zaoulagad,  
Ha, beteg ar maro,  
E weli gant kalounad  
O stourm Pôtrede va Brô !

4

Pa lugerno ann devez  
Ma zistrofomp d'ar gear,  
Klevit, gant al levenez,  
O tinsal ar c'hleier,  
Ann evned ô richani,  
Er gwé leunn a vleunio :  
Gloar, enor a meuleudi  
Da Soudardet va Brô !

Josef IAKOB.